



## Ar c'habiten

Fichenn savet gant guylaine Sergent

### Evit piv ?

Div skipailh -etre 5 ha 10 bugel  
-adalek 8 vloaz

### Dafar

kreionnoù ha paper e pep skipailh, daou « tok kabiten »

### Pelec'h ?

E-barzh pe er maez (en ul lerc'h di-avel)

### Pal

Echuiñ al listenn gerioù kinniget gant ar buhezour

### Padelezh

Dipan a ra deus al listenn (60 ger : war-dro un hanter eur).

### Doare da c'hoari

Ur c'habiten a zo e pep skipailh (an tok gantañ war e benn), hemañ a ya da gerc'hat ur ger gant ar buhezour (a c'hell bezañ e kreiz, pe oc'h en em bourmenn un tamm e pep lerc'h), a-benn distreiñ en e skipailh da dresañ an dra hep rannañ grik.

An hini gantañ a gav petra eo a lak an tok hag a ya da glask un eil ger en eskemm d'an hini kavet.

### Fin ar c'hoari

Pa vez echuet al listenn gant ar skipailh gantañ.

### Skouer ul listenn gerioù :

-bag  
-goulou  
-medisin  
-disglavier  
-kador  
-morganez

*-steredenn  
-ti  
-mor  
-un toull  
-skritell  
-ur plad  
-ur vuoc'h  
-netra  
-laboused  
-bezhin  
-ur pizza  
-dour  
-oabl  
-perlez  
-marc'h-houarn  
-ur bladenn arc'hant  
-un ars  
-marc'h-houarn*